

Bloavezh mat deoc'h, lennerien gaezh !

# oremañ

EKONOMIEZH

**Kudennoù  
a-leizh  
gant ar  
c'hregina**

RADIO

**Reuz e  
R.B.I.**


TEULIAD AR MIZ

**Rusia veur  
an huñvre  
kozh a  
nevez**



## An diwaskenn Kudennoù ekonomikel hon amzer

E niverenn miz Kerzu ar gelaouenn l'Histoire, emañ ar c'helenner skol-veur Jacques Marseille o keñveriañ an darvoudoù drastus emañ hon ekonomiezh o c'houzañv hiriv an deiz gant a re a oa bet gwallaonet lusk ar Produiñ ganto abaoe derou ar prantad greantel (industrial). Hervezañ e tennfe muioc'h reuz ekonomikel hon amzer da diwaskenn 1873 eget da enkadenn 1929.



aozerien ha gouzañverien, an darn vrasañ ac'hanomp hep gouzout deomp, kazi an holl ac'hanomp divarrek da lavarout ha fardet e vo deomp ur blanedenn eürusoc'h gant an diwaskenn pe kaset e vimp ganti trema an diskar sokial pellañ. An diwaskenn a zo anezhi en ur mod strizh, un enkadenn astennet, un torr er c'hempouez ekonomikel hag a zo e bennkaozioù o kenderc'hel da efediñ. Kiriek eo astenn an diwaskenn ma'z eo aloubet tamm ha tamm, an urzh vat ganti. Koll a ra an urzh vat he nerzhioù dre ma koll ar vuhez ekonomikel he re. Emañ kargoù buhez speredel ar c'heodedoù o c'houzañv enep taolioù reuzioù o buhez organek hag ekonomikel. Gant dichal an dimeziñ e teuo anat an diouer a feiz en amzer dazont. Kresk niver an emlazhadennoù hag an torfedoù a yelo

**EVIT AR BREZHONEG**  
Kazetenn evit  
deskiñ brezhoneg  
B.P. 3 = 29450  
KOMMANNA  
6 niverenn  
75 lur

d'ober efed meur hurennek an torr er c'hempouez ekonomikel". E 1929, da heul ar freuz-yalc'h, e voe kaset trumm tud a hentadoù trema an dilabour. Kouezhañ a reas neuze ul lodenn eus ar boblañs en dienez. War-bouez un nebeud broioù evel an Unvaniezh Sovietel gant hec'h ekonomiezh sturiet, pe Aostralia ha Su Afrika, e tinerzhas fonnus ar Produiñ er bed industrial a-bezh war an holl dachennoù. E 1932 e tizhe ar Produiñ ul live 35% izeloc'h eget e hini e miz Even 1929. E 1993, e chom c'hoazh un elfenn a lusk en ekonomiezh an takadoù industrial kozh. Ma'z a da glañv fall forzh tachennoù ekonomikel enno, e seblant reoù zo bezañ ya'c'h. Tra ma striv ar c'hornadoù se da daliñ ouzh an diskar, e tastum nerzh forzh broioù nevez erruet e-touesk ar bourchaserien madoù oberied eul Maroko, Sina, Tailand, Turkia, India hag Indonezia. O vezañ e vez izel goprou ar vicherourien enno, ez a da greñv o nerzh-kevezañ en ur marc'had etrebroadel digor. Peadra a zo da zastum e teuint da vezañ dizale pennstadoù ekonomikel. Pell emaoimp neuze diouzh stad an traoù ar bloavezhioù 1930. Solutoc'h eo ar geñveriadenn gant diwaskenn 1873. War-lerc'h

ur prantad frouezhus evit an aferioù a badas eus ar bloavezhioù 1840 betek fin ar bloavezhioù 1860, e kollas ar Produiñ e lusk. Er Rouantelezh Unanet, anezhi ar stad a oa aet ar pellañ war hent an diorren industrial, ne dizhas ket ar c'horvoder broadel an 11% a gresk etre 1870 ha 1890. War-lerc'h bezañ bet daougemmet etre 1840 ha 1874, e chomas produadur diabarzh gros Bro C'hall gant ar memes live betek 1895. Evel hiriv ne voe ket tizhet an holl dachennoù ekonomikel gant reuz an diskar. Tra ma save kudennoù gant ar fardañ boued da skouer e oa lusk gant industriezh an tredan, e teue brav gant hini ar gimiezh. Evel hiriv e tastum nerzh, lod broioù o tihuniñ, evel Rusia. Kreskiñ a rae pouez an eziporzhadurioù e lod broioù eus Azia hag eus Amerika ar Su, war-du Europa, pezh a roas lañs d'ar warezelouriezh enni. Dic'hortoz e voe adkrog al lusk industriezhel kreffiv a erruas e-kreiz ar bloavezhioù 1890. Klotañ a rae lusk nevez ar Produiñ gant hini ar jinañ. Setu ar pezh a embanne an ekonomour a vro Rusia Dimitrievitch Kondratieff e 1926 diwar-benn an adkrog-se. "Da geñver war-dro daou zekved

araok lanv un amdroad bras, e vez merzet ul lusk kreñvoc'h war tachenn an ijinañ teknikel. Araok pe e derou al lanv, e vez merzet un implij eus frouezh an ijinañ se en industriezh, un implij liammet gant un adstummañ eus ar modoù Produiñ. Klotañ a ra peurliesañ derou an amdroadoù bras gant ul ledanañ eus kelc'hdro an darempredoù ekonomikel etrebroadel". Marteze e vo lakaet termen d'hor c'hudennoù ekonomikel gant ul lusk-ijinañ par da hini a baras diwaskenn ar c'hantved diwezhañ. Peadra a zo da zastum emañ an diskoulm en implij ar robodouriezh, el liammañ etre ar stlenouriezh digreizennet hag ar pellgelaouerezh, e diskar ur mod kozh hoyellet gant enkadenn ar sentiñ. ■


**Gerva :**  
Freuz-yalc'h : Krach boursier  
Korvoder broadel : revenu national  
Produadur diabarzh gros : produit intérieur brut  
Gwarezelouriezh : protectionnisme  
Amdroad : cycle  
Robodouriezh : robotique  
Stlenouriezh : informatique  
Pellgelaouerezh : télécommunication



Marteze e vo lakaet un termen d'hor c'hudennoù ekonomikel...

## DIWAN

**O pedaliñ evit Diwan**  
Aberystwyth. Ur studier eus Skol-veur Aberystwyth, Gaoimhin Knox, oadet a bevar bloaz warnugent, o klevout lavarout e oa kudennoù arc'hant gant Diwan, en deus lakaet en e benn ober un dro baomlet. 160 Kilometrad en deus graet evelse, tro Ceredigion, ha deuet eo abenn da zastum 4000 evit sikour ar skolioù brezhonek. Trugarekaat e c'haller koulz Caoimhin ha Rhisiart Hincks, kelenner war ar c'hembraeg hag ar brezhoneg e Skol-veur Aberystwyth, hag ivez holl vignoned Vreizh a zo ken niverus e Kembre. ■



Paol ar Meur

## Manifestadeg

Brest, d'an 20 a viz Kerzu. Ur manifestadeg a zo bet aozet gant kerent hag implijidi Diwan Penn ar Bed dirak ar C'hwartz evit goulnenn digant "Tadou Nedeleg" ar politikerezh soñjal e bugale Diwan en deizioù-mañ. Deuet e oa di 100 den bras ha kemend-all a skolañidi. Degaset o devoa bugale skolañ Diwan Roparz Hemon pe a re votoù ha lakaet anezho war an diri dre lec'h ma tremene dilennidi ar Rannvro, evel ma veze graet gwechall ma veze lakaet botoù dirak an oaled. Fuloret bras e vije bet an "Tad Nedeleg Bourjez", ha lavaret en dije : "Mard eo evelse e tenniñ ar yalc'had nevez votet gant ar C'huzul Rannvro". Bugale fall eo reoù Diwan, memestra, dont da glemm ouzh an aotrounez evelse!! O komz e oa Bourjez eus ur yalc'had a 850 000 lg. a vije bet votet eizhtelz oa. Mard eo evel yalc'had 92 (750 000 lg.) pe hini 93 (1 500 000 lg.) ha n'eus ket bet gwelet a liv anezho... ■

## ■ SKOL-VEUR BREST

Unvaniezh Studierien Breizh-Izel zo bet savet gant studierien eus skol-veur Brest, c'hoant ganto difenn ha kas war-raok yezh ha sevenadur Breizh. Oberiant int war-veur a dachenn : deuet int a-benn da c'hounit panelloù brezhonek er savadurioù nevez a vo gant Skol-Veur Breizh-Izel e kreiz kêr Brest, lod anezho a ra war-dro un abadenn sonerezh keltiek skignet war Fréquence-Mutine (103,8 MHz e Brest ha tro-war-dro), ur fest-noz aozet ganto e Ti-Kêr Brest en doa graet un tamm mat a verzh e miz Kerzu... O chomlec'h : USBI-Dazont, 20 bali Le Gorgeu, 29200 Brest, pg. 98.80.26.71.

## ■ GOUEL AR C'HOARIVA BERZH E BREST

Eil gouel ar c'hoariva brezhonek a oa e Brest d'ar 26, 27 hag 28 a viz Du e Lambézhelleg, e Brest, aozet gant ar gevredigezh SKED. Ar gouel kentañ a oa bet e miz Du 1992, gant ar memes strolladoù, Strollad Plougin, Teatr Brezhonek Penn-ar-Bed hag Ar Vro Bagan. Iwerzhon a oa danvez boutin an holl bezhioù kinniget deomp ar bloaz-mañ : "Puñs ar Sent", skrivet gant an Iwerzhonad J.M. Synge, "Un abadenn e-kreiz an noz" ha "Nannie a ya kuit", gant an Iwerzhonad Seán O

Casey, ha "Benn arc'hoazh e vo deiz c'hoazh", skrivet gant ar Breizhad Gwilhoù Kergourlay. War-raok eo aet ar strolladoù-se, abaoe ar bloavezhioù 70, ma oant kalz "engouestloc'h", o c'hoari pezhioù diwar-benn an energiezh nukleel, al labour-douar... tra ma c'hoariont pezhioù "klaseloc'h" bremañ, pe e vefent krouet ganto pe e vefent troet pe aozet diwar testennoù koshoc'h. E 1994 e vo lidet o ugentvet deiz-ha-bloaz, ken gant strollad Teatr Brezhonek Penn-ar-Bed ken gant strollad Ar Vro Bagan.

Berzh a reas an teir abadenn kinniget da dud korn-bro Brest : war-dro 150 den en div gentañ, ha 50 en tredo a veze c'hoariet evit an 18vet gwech hag evit an eil gwech e Brest. Evel-se he deus diskouezet SKED, ur gevredigezh o vodañ un 20 bennak a strolladoù sevenadurel breizhek eus Brest ha tro-war-dro, ez eus tu da sevel obererezhioù brezhonek eno. Goude ur bloavezh labour eo krog SKED da vezañ anavezet e Brest, ha bodañ a ra muioc'h-mui a gevredigezhioù, a c'hall implijout ar binvioù boutin zo ganto : ur burev dreist-holl, aveet-mat, ha daou zen o labourat ennañ. Deuit d'ober un dro : 4 straed Koad ar Mor (Bois d'Amour), e Brest, pg. 98.80.26.71.

## ■ MARV

Marv eo Alain Guel, skrivagner gallek, bet savet romantou ha barzhonegoù gantañ, en deus kenlabouret gant meur a gelaouenn vrezhat, dindan meur a anv-pluenn, Sav Breizh, Breizh, L'Avenir de la Bretagne. Pevar-ugent vloaz e oa, ha douaret eo bet e Treveneg, e Bro Sant Brieg. Marv eo ivez Visant Seite, ar beleg eus Bro Leon, bet savet gantañ meur a lev-r e vit deskiñ brezhonek, ha meur a lev-r e vefennoù (Ar marc'h reizh...). E-pad meur a vloavezh e voe sekretour ar Bleun Brug. Marvet eo d'an oad a 85 bloaz, ha lidet e voe e obidoù en e barrez c'hendik, Kleder.

## ■ GOUELIÂN

Sed an anv zo bet roet d'un aozadur nevez savet evit brudañ pemp bag a c'hiz kozh advaret e meur a borzh eus Penn-ar-Bed, ar "Recouvrance" e Brest, an "Dalch Mat" e Landerneev, ar "Belle Etoile" e Kameled, ar "Belle Angèle" e Kemper. Ur fram-kennwerzhel boutin e vo "Goueliân" hag un doare paramantour evito, o klask tud prest da baeñ da vageal warno. O brudañ a raio ivez, azañ a raio gouelioù a bep seurt tro-dro d'ar bigi a c'hiz kozh... Digor eo an aozadur "Goueliân" d'an holl re a rafe war-dro listri kozh all.

## ■ KERNEV

E Kemper hag e Douarnenez e vo emglev etre an emsav breizhek, ar Re C'hlav hag an "Tu kleiz disheñvel", evit mont war ar renk en dilennadegoù kanton a vo dizale. Paskal Bokou, eus ar GRIL, en em ginnigo e Douarnenez, Annaig ar Garz, eus Ijin, e Kemper-Ploevilh-Pluguen, Daniel Bigot, eus Kemper-Les Verts, moarvat e Kemper-Kerfeunteun, hag Alain Ugen, eus ar Re C'hlav, marteze en Erge Vras hag en Erge Vihan. Un destenn voutin a vo savet ha sinet gant tud eus an teir c'hostezenn, hogen ne vo ket un emglev politikel na hirbad na berriad, emezo.

## REUZ E RADIO BREIZH IZEL

## AN ABADENNOU BREZHONEK EN ARVAR



En un diskleriadur da Ouest-France Kemper e lavaras rener R.B.I., e dibenn miz Du, e oa o klask reiñ lañs en-dro d'e skingomz, hag evit-se e kinnige e vefe displegadennou e galleg e-korf an abadennoù brezhonek! "Un divyezhezh vadern" e vefe, hag evel-se e c'hallfe an abadennoù-se bezañ komprenet gant gallegerien... Lavaret a reas ivez en doa c'hoant e vefe krennet an abadennoù keleier brezhonek a vez diouzh ar mintin.

Diouzhtu e voe klevet mouezh sindikadoù C.G.T. ha C.F.D.T. implijidi R.B.I. o tamall da rener ar skingomz embann traoù faos ha klask diskard an abadennoù brezhonek. Rak ma'z eo gwir ez eus digres e niver ar selaoerien evit an abadennoù brezhonek, e ranker lavaret ez eo brasoc'h an digres evit abadennoù gallek zo. Hervez ar sifroù-se ivez (ur sondañ gant e-touez 500 den o chom e Penn-ar-Bed) e vez kement a dud o selaoù ar c'heleier brezhonek hag ar c'heleier gallek. O klask laou e penn ar vrezhonegerien a oa rener R.B.I. Meur a gevredigezh sevenadurel, o klevet ar c'helou, a skrivas diouzhtu da renerzh Radio-France, e Kemper, pe gwelloc'h c'hoazh e Pariz, peogwir ez eo e

Pariz e vez divizet seurt traoù, da lavaret ne felle ket dezho e vefe nebeutoc'h a vrezhoneg war R.B.I. : galleg en abadennoù brezhonek, echu gant an abaden vrezhonek nemet evit ar vugale, keleier berroc'h diouzh ar mintin... Kanevedenn eus Brest, Emgleo Breizh, hag all, a gasas lizhiri, Stourm ar Brezhoneg a gasas un tiked tren da rener R.B.I. evit ma c'hallfe distreiñ da Bariz, Kuzul Sevenadurel Breizh a c'houlennas digantañ dilezel e bost... Hag e diabarzh R.B.I. e voe meur a gaozeadeg, kalet, etre ar rener ha lod eus an implijidi, ar re anezho zo stag ouz ar vrezhoneg d'an nebeutañ...

Setu ma rankas ur penn bras eus Pariz dont betek Kemper da glask kompezañ an traoù. Jean-Pierre Farkas, rener rouedad "digrezenet" skingomzoù lec'hel Radio-France, a zeuas da Gemper d'ar 17 a viz Kerzu. Eno en em gavas gant an implijidi, hag ivez gant un toullad emsaverien deuet da gaozeal gantañ, ha kilañ a reas un tamm. Ne vo ket cheñchet, emezañ, an abaden vrezhonek hir nemet, hini an noz. Diouzh ar mintin, avat, e vo kemm : bez' e vo, adalek penn kentañ miz Genver, 2 vunutenn a geleier da 6 eur ha kard, 3 munutenn da 7 eur ha kard, 3 munutenn da 8 eur ha

Hervez rener Radio-Breizh-Izel, ar skingomz stag ouz Radio-France a skign abadennoù e Penn-ar-Bed hag en ul lodenn eus Aodoù-an-Arvor, e vefe nebeutoc'h-nebeutañ a selaoerien gant an abadennoù brezhonek.

kard ha 2 vunutenn da 9 eur, e lec'h 5 munutenn da 7 eur ha kard ha 5 munutenn da 8 eur ha kard evel ma'z eus bremañ. Abadennoù kalz berroc'h eta. Lavaret a reas J.-P. Farkas d'an emsaverien a oa bet ouz e gavout e oa prest da zegemer tud, kevredigezhioù ha penna-durezhioù, e penn kentañ 94, evit komz diwar-benn danvez abadennoù Radio-Breizh-Izel.

Kilet o deus renerien Radio-France, un tamm, hogen n'omp ket aet war-raok, ha ken pell emamp atav diouzh ur servij skingomz foran a rofe e blas da yezh hor bro. Gwelat hon eus o deus pouez ar c'hevredigezhioù sevenadurel breizhek pa fell dezho pouezañ holl a-gavret. Deomp-ni, selaoerien, eo R.B.I. : greomp ganti eta, ha greomp ivez gant ar skingomzoù all zo er vro, o kas dezho kemennadennoù, lizhiri, ... Met ma fell deomp kaout ur skingomz a rafe gant ar brezhoneg, e vefe poent deomp en em soñjal war an doareoù da sevel unan. Tud varrek zo, danvez zo ivez, gant an holl skingomzoù a skign abadennoù brezhoneg : Radio Kreiz Breizh, Radio Bro Gwened, Radio Rivages, Fréquence Mutine, Alternantes, hag all. Peadra a vefe evit sevel ur skingomz vrezhonek, pe vrezhek d'an nebeutañ, gant he renerzh e Breizh, hag o reiñ ur plas reizh d'hor yezh ■

I. Kadored

## SKINGOMZ

## ABADENNOU SKINGOMZ E BREZHONEG

**E Kernev, Leon ha Treger :** Radio-Breizh-Izel (93 MHz)

**E Treger ha Kernev-Uhel :** Radio Kreiz Breizh (102,9 MHz) (2 eur 30 a vrezhoneg bemdez)

**En argoad Bro Wened :** Radio Bro Gwened (101,7 MHz) (2 eur a vrezhoneg bemdez)

**E Bro Vrest :** Fréquence Mutine (103,8 MHz) (brezhoneg d'ar sadorn etre 11 eur ha kreisteiz hanter)

**E Naoned :** Alternantes (98,1 MHz) (brezhoneg ep meurzh da 19 e 40)

**E Breizh-Uhel :** Radio an Arvor - gwagennoù etre 711 (abadenn vrezhonek bep Sadorn etre 12e ha 2e g.k.) ha war 103,1 MHz, (bep Yaou noz etre 7e15 ha 9e15)

**Radio Rivages** (89 MHz e Brest, 92,6 e Kemper, 99,6 e Kemperle ha 105,2 MHz e Karaez) (abadennou brezhonek bemdez).

■ STOURM AR SKINWEL

Goude ar galv a voe graet gant Stourm ar Brezhoneg, er miz tremenet, da nac'h paeñ an taos skinwel (s.o. Bremañ miz Kerzu 93) hon eus klevet e oa un den eus Brest a nac'he paeñ an taos abaoe ur pennadig amzer hag en deuze bep an amzer lizhiri a-berzh gwazardur an taosoù-skinwel, o c'houlenn digantañ paeñ. Betek-henn n'eo ket aet an traou pelloc'h, ha bez' emañ an den-se bremañ e darempred gant Stourm ar Brezhoneg a zo mennet d'e zifenn.

Adembann a ra ar strollad-se e c'halv. Mar fell deoc'h kaout brezhoneg er skinwel, mar nac'h paeñ an taos skinwel, pe mar befec'h prest d'en ober, kit e darempred gant ar gevredigezh en ur skrivañ da : S.A.B., B.P. 15, 29480 Ar Releg Kerhuon.

■ KUZUL SEVENADUREL BREIZH : Per Denez o vont kit

Ur prezidant nevez zo gant Kuzul Sevenadurel Breizh a oa bodet e Roazhon d'ar 4 a viz Kerzu. Lezet en deus Per Denez e blas gant Jean-Louis Latour, prezidant ar gevredigezh Kendalc'h. Un daougent kevredigezh sevenadurel vreizhek bennak zo er C'huzul-se, a-gevret gant un nebeut dilennidi eus pemp kuzul departamant Breizh, eus ar C'huzul Rannvro

hag eus kêrioù brasañ ar vro, ha pennadurezhioù all, hag alioù a roont d'ar Rannvro war an dachenn sevenadurel. Skuilz e oa aet Per Denez gant e garg, ha roet en deus e zilez eta. Dilennet eo bet Jean-Louis Latour, 59 bloaz, eus Reudon, en e blas. Lavaret a reas ar prezidant nevez, en un emvod gant ar gelaouennerien e Roazhon, e oa e soñj kendalc'her gant labour Per Denez, o vrudañ labour ar C'huzul Sevenadurel hag o klask kaout darempredoù stankoc'h gant broioù bihan all. En emvod meur ar C'huzul, d'ar 4 a viz Kerzu, e voe votet meur a vennad, unan anezho o c'houlenn digant rener Radio-France-Bretagne-Ouest mont kuit, abalamour da gomzoù hemañ diwar-benn abadennoù "e" skingomz. Klevet hon eus abaoe e oa prest Jean-Pierre Farkas, rener skingomzoù lec'hel Radio-France e Paris, da gejañ ouzh Jean-Louis Latour, prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh.

■ HANTER-KANT VLOAZ B.A.S.

Bodadeg ar Sonerion a voe krouet e 1943 evit reiñ lañs en-dro da sonerezh hengounel Breizh a oa o vervel. Hanter-kant vloaz war-lerc'h eo bev-buhezek ar gevredigezh, gant 3000 ezel ha 70 bagad e Breizh hag e-touez ar Vretoned divroet e Bro-C'hall. Lidet e voe an hanterkantvet deiz-

ha-bloaz-se gant ur sonadeg veur e Gwened, dirak ur sal leun a dud e Palez ar Sevenadur.

Bep daou viz lennit

**AL LANV**

59 hent Kerdonioù Vihan  
29000 Kemper  
Koumanant bloaz : 130 lur  
Skoazell adalek 160 lur

■ UR C'HELENNER BREZHONEG SKARZHET DIOUZH E LABOUR

C'hwec'h miz goude ma voe tapet ar c'h-CAPES gantañ e voe kemennet da Sylvain Botrel, kelenner brezhoneg e lise an Danteg e Lannuon, e oa skarzhet diouzh e bost, en ul lizher kaset dezhañ gant Ministrerezh an Deskadurezh. An abeg? Pevar bloaz zo e oa bet kondaonet gant lez-varn Roazhon evit bezañ livet luganioù war mogerioù ar Skol-Veur, ha chomet eo e gondaonidigezh war e "roll kastizoù", ar pezh a vir outañ, hervez reolennoù ar velestradurezh c'hall, a labourat dindan ar Stad. Unvaniezh ar Gelaouennerien Brezhoneg, Stourm ar Brezhoneg, an A.P.E.E.B. o deus savet o mouezh evit difenn Sylvain Botrel ha goulenn ma c'hallef chom da gelenn brezhoneg. Goulennet en deus Sylvain Botrel, en ul lizher d'ar ministrerezh, ma vefe tennet e gondaonidigezh diwar e roll kastizoù. Da c'hortoz avat n'eus mui den ebet o kelenn brezhoneg, hag istor ha douaroniezh dre ar brezhoneg, evel ma rae da skolidi an hentenn divyezhek, e lise Lannuon, rak nac'het o deus kelennerien all kemer e blas, dre gengred gantañ, pa voe goulennet diganto gant an Enseller Akademiezh.



Per Denez ha Jean-Louis Latour, prezidanted Kuzul Sevenadurel Breizh.



eno e oa bet toullbac'het ha lezet da vont goude-se.  
• E dibenn miz Kerzu e voe war-dro 700 den, deuet eus hanternoz Euskadi, o kerzhet hag o kanañ dirak prizonioù rannvro Paris, enno prizonidi bolitikel euskarat, eus ETA pe eus l'apararrak. ■

YEZHOU SUAFRIKA

Er bonreizh nevez, asantet dezhañ gant strolladoù politikel liesseurt Suafrika e dibenn miz Du 93, e lavarer e vo 11 yezh ofisiel er Stad : an afrikaneg - yezh an drevadennerien gozh -, ar saozneg, ar zoulou - ar yezh komzet ar muiañ eno -, ar xhosa, ar sotho, an tswana ha pemp yezh vantou all. ■

LU EUROPA : UR YEZH OUZHPENN

Deuet eo a-benn Ministr Belgiat an Armeoù, Leo Delcroix, ur Flandrezad anezhañ, da lakaat an Eurocorps, danvez-lu Kumuniezh Europa, da zegemer an izelvroeg evel yezh par d'an teir yezh ofisiel all, ar galleg, an alamaneg hag ar saozneg. Pep skrid ofisiel a vo troet en izelvroeg eta ha graet e vo gant ar yezh-se er strolladoù soudarded a-orin eus an izelvroioù hag eus Flandrez. An ofisourien, int, a gendalc'ho, digouenn, da ober gant ar saozneg. ■

PALESTINA : UR SKINGOMZ HAG UR SKINWEL

Gant Kumuniezh Europa eo bet kaset Philippe Dasnoy, bet e penn RTBF (skingomz ha skinwel gallek Belgia), da Jericho da grouiñ ur skingomz hag ur skinwel palestinat. ■

KEBEK

En dilennadegoù a voe e Kanada e dibenn miz Du ez eas 54 sez gant ar "Bloc Québécois" diwar ar 75 zo gant Bro-Gebek e Parlaman Kanada. Ar wech kentañ eo ez afe kement-se a sezioù gant broadelourien Gebek er Parlaman kevredadel. Pal ar "Bloc Québécois" eo sevel ur stad kebekat dizalc'h diouzh Kanada. ■ Iwan Kadored

AR SKINWEL E BREIZH HAG E KEMBRÉ

D'ar merc'her 15 a viz Kerzu, e Gwengamp, e voe dalc'het un diviz er Greizenn Sevenadurel Roparz Hemon, diwar-benn ar skinwel e Breizh hag e Kembre. D'an nozvezh-se, aozet gant Kreizenn Sevenadurel Gwengamp, e oa bet pedet Twm Morris, ur C'hembrid ar labour evit skinwel e vro, Nolwenn Korbel, a labour evit France 3 Breizh hag a zo bet o labourat e Kembre, ha Herve ar Beg, eus Stourm ar Brezhoneg. Displegan a reas Twm Morris, e brezhoneg, penaos e oa bet krouet ar chadenn S4C a skign bremañ 30 eurvezh a gembraeg bep sizhun, goude un hir a stourm. Ar goulenn a oa gant an holl dud deuet d'an abadenn a oa evel-just "ha posubl e vefe e Breizh ivez?". Ha posubl e vefe kaout e Breizh ur skinwel a gomzfe yezh ar vro, yezh kantadoù a villadoù a Vretoned? Ha posubl e vefe krouiñ labour evel ma'z eus bet graet e Kembre - etre 2000 ha 3000 den a vev diwar labourioù krouet en-dro d'ar chadenn S4C, ha se en ur vro n'eo ket brasoc'h eget Breizh. "Ya" a lavar Stourm ar Brezhoneg, eno emañ an diskoulm nemetañ, mar fell deomp saveteli hor yezh. Hag ali e oa an darn vrasañ eus ar berzhidi e oa un dra bosubl hag un dra ret, dreis-holl pa weler abadennoù brezhonek France 3 o vont war an diskar : nebutoc'h a draoù evit ar vugale, abadennoù dister alles, lamet a-wechoù... ■

EUSKADI : FRANKIZ WAR AR GOMZ

Ouzhpenn 55000 den o doa manifestet e Bilbao d'an 18 a viz Kerzu evit difenn ar gelaouenn "Egin" hag ar frankiz war ar gomz. Abaoe meur a viz bremañ e vez taget ar gelaouenn-se gant ar gouarnamant spagnol ha gant gouarnamant Kumuniezh Emren Euskadi. "Direnkak" a ra kelaouennerien "Egin", abalamour ma klaskont reiñ d'o lenneñerien, war-dro 140.000 zo anezho, keleier disheñvel diouzh savboent ofisiel ar galloud, abalamour ma enklaskont itrikoù a bep seurt gouarnamant Bro-Spagn pe hini Kumuniezh Euskadi. (sellet ouzh ar pennad paj. 12) Setu perak eo krog tud Egin gant ur sinadeg etrebroadel da zifenn o c'helaouenn : sinet eo bet gant miliadoù a dud endeo, isprezidantez Parlamant Europa ha meur a strollad breizhek en o zouez. Evit gouzout hiroc'h e c'hallit skrivañ da Egin, Postapartatura 1397, 20080 Donostia. ■

EUSKARIZ

• E-kreiz miz Kerzu e oa bet harzet Ifñaki Lopez de Bergara, un Euskarad repuet er Stad C'hall, gant an archerien, e-kichen Medrigneg, e Bro Sant Maloù, ne ouzer ket pelec'h edo dalc'het Ifñaki e dibenn miz Kerzu. E 1987 e oa bet harzet gant ar polis gall dija ha roet da bolis Bro-Spagn,

# RUSIA VEUR AN HUNVRE KOZH A NEVEZ

Tenn eo bet an dihun d'ar re a grede e oa Rusia o vont war he fouezig trema un demokratelezh peoc'hgarour. Doñvaet, gouez dezho, an arzh rusian. Gant berzh Zhirinovskiy en dilennadegoù diwezhañ e tiskouez an arzh e skilfoù adarre, ha Rusia Veur eo an amkan.



A-hervez e vefe c'hoazh un 200.000 bennak a soudarded rusian e diavaez Rusia...

pezh a zlefe nec'hiñ an dud avat eo e klot prezeg Zhirinovskiy ouzh ar pezh a soñj an arme.

## POUEZ AN ARME

A-hervez e vefe c'hoazh un 200.000 bennak a soudarded rusian e diavaez Rusia, er "broioù estren nes" pergen, da lavarout eo e republikoù kozh an Unaniezh Soviedel. "Bez' e kred ar vilourion e vo un asez adunaniezh prestik," eme Bavel Felgengauer, arbennigour milourel evit ar gazetenn Segodnya. "N'eo ket hiraezh d'an impalaerezh kozh hepken, kalz dañjerusoc'h eo." E gwirionez en deus Yeltsin lezet an arme d'ober mui pe vui ar pezh a garent, moarvat evit prenañ an tamm peoc'h politikel diganto. Kement-se en deus kaset an arme da vezañ emrenoc'h c'hoazh d'lozhañ ar renad politikel o wanaat.

A zo gwashoc'h, emañ an arme rusian o sevel ur politikerezh diavaez dezho o-unan. Skoazellet o deus emsavid Abkhazia ouzh galloud Shevarnadze e Georgia. Savet o deus ur republik emren Tra-Dniestr e Reter Moldavia. Lakaet o deus ar c'homunour taer

Gaidar Aliyev e penn Azerbaijan. Chom a reont en Armenia da evezhiañ harzoù ar vro-hont. Hag e Tajikistan e skoazelont ar gomunourion rusiangar da zerc'hel o c'hrog war ar vro. Diazezet mat eo mennoz an impalaerezh e kalon ar Rusianed. A-hed ar c'hantvedoù ez eo bet dodenn an arzourion, ar skrivagnerion, an eskibion, ar soudarded, ar brederourion. Ur c'hefridi sakr eo hini Rusia: bezañ an trede Roma, e penn a-raok an emsav etre-slav, difennet ken taer gant unan evel Solzhenitsyn hiziv an deiz.

Daoust hag en-dro da Zhirinovskiy pe da unan all e vo adsavet an unaniezh evit Rusia Veur? Den ne oar. Hogen ankeniet eo an holl amezelon o welout stad an traoù. Hag Ukraina eo ar vro he deus da zisfizout ar muññ diouzh ar Rusianed. Setu perak n'eus ket mall warno plegañ da c'houlennou an Amerikaned hag ar Rusianed evit ma tizoberiint o fuc'hellou derc'hanel, daoust d'ar promesaoù graet. Ul loen re c'harv eo an arzh rusian, se o deus desket a-hed o istor ■

Herve Kerrain

## LIECHSTENTEIN

War-lerc'h an dilennadegoù diwezhañ ez eo bet anvet Mario Frick, 28 vloaz, da Benministr ar vro. Al levier gouarnamant yaouankañ en Europa eo an avakad-mañ, deut ma oa an trec'h gant e strollad, Unaniezh ar Vammvro, war-lerc'h ma voe divodet ar Parlamant kozh gant Priñs Hans Adam II. ■

## ALAMAGN

Adkavet ez eus c'hwec'h sonata evit ar piano diwar dorn ar sonaozour Joseph Haydn. A-hervez e vefe ar sonataoù-se unan eus kavadennoù pennañ ar c'hantved a-fet sonerezh. ■

Anzavet en deus gouarnamant Bonn bezañ paeet DM 8 miliard evit diubidigezh disivouderion Reteralamagn, div wezh ar c'hementad a veze anzavet betek-henn. A-hervez e veze paeet an arc'hant d'ur gont dalc'het gant Erich Honecker, ar c'hard eus ar sammad o vezañ bet miret gantañ e-unan. ■

## ROUANTELEZH UNANET

Reuz zo savet e diabarzh Iliz Bro-Saoz p'en deus embannet David Jenkins, eskob Durham, ne grede nag en ifern peurbadel nag en eil distro ar C'hrist. Respontet en deus arc'heskob Canterbury, penneskob an Iliz, e oa ar Baradoz, an ifern ha distro ar C'hrist e-kreiz-kalon ar feiz kristen. Ar Rouanez, penn politikel an Iliz anglikan, n'he deus-hi lavaret netra. ■

## KORSIKA

E karc'har Villeneuve Lagrande emañ bac'het Guidu Bozieglav. Harz-debriñ a ra ar prizoniad politikel korsikan-se peogwir e vez nac'het outañ ar gwir da gas ha da zegemer lizhiri skrivet en e yezh, ar c'horsikaneg. Ne c'hall ket degemer kazetennoù korsikanek kennebeut. ■

H.K.

## KURDED

E dibenn miz Du 93 e oa bet harzet, e Breizh hag e Bro C'hall, tremen 100 Kurd repuet eus

## KAZETENNOU BREIZH

L'Avenir de la Bretagne (POBL) 150L/bloaz BP 4103 - 22041 Sant Brieg Cedex 2

Combat Breton (Emgann) 150L/bloaz BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex

Le Peuple Breton (UDB) 160L/bloaz BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

Armor magazine 225L/bloaz Pont Sant Jakez BP 419 22404 Lambal Cedex

Turki, war urzh Ministr gall an Aferioù Diabarzh. Hervezañ e lakae ar Gurded-se diogelroez ar Stad C'hall en arvar, ha tost e vijent bet ouzh ar P.K.K., ar strollad a stourm evit frankiz Kurded Turki. E Breizh e voe harzet pemp den, e Naoned, Roazhon ha Kastellin, ha dalc'het un devezh-pad, a-raok bezañ lezet da vont hep bezañ tamallet. Lakaet e voe berz gant ar Ministr gall ivez war div gevredigezh kurd, "Yek-kom" ha "Komite Kurdistan". E-keit-se, e miz Du, e voe gwerzhet biñsaskelloù gall da arme Turki, hag e miz Du ivez e voe kondaonet pemzek emsaver kurd d'ar marv gant lez-varn Diyarbakir, kêr vrasañ Kurdistan Turki...

Ar strolladoù breizhek Emgann, U.D.B. ha Dazont a embannas o c'hengred gant ar repudi gurd hag a savas o mouezh a-enep emzalc'h ar Stad C'hall a sikour Stad Turki da vougañ ar Gurded ■

I.K.


## Adkoumanantit da Vremañ !

ar gelaouenn vrezhonek  
200 lur ar bloaz  
Skozell adalek 250 lur

### Tagadenn ouzh frankiz ar c'helaouiñ

## EGIN en arvar

**Goude marv Franco e oa koulz lavaret holl gazetennou Euskadi dindan dalc'h strolladoù pe embregerezhioù tost o c'halon hag o yalc'h ouzh ar fachisted. Ezhomm bras a oa eus ul lec'h ma vefe eztaolet mennozhioù araokour ha broadelour liesdoare.**



Evel-se e voe krouet EGIN e 1977 gant skoazell arc'hant an Euskariz o-unan, bodet en ur gevredigezh. Embannet e vez bemdez 65 000 skwerenn en euskareg hag e kastilhaneg, ar pezh a laka niver al lennerien da ouzhpenn 140 000. Abaoe bloaz ez eus bet ouzhpennet ur c'haierig e liv, gouestlet d'ar sevenadur, d'ar sportoù ha d'ar yaouankiz.

Abaoe 1989 ez eus bet lakaet war-sav ivez ur skingomz, EGIN IRRATIA : 24 eurvezh abadennoù bemdez, en euskareg evit 80 %. Evel he c'hoar henañ ez eo kefridi EGIN IRRATIA degas d'ar selaoerien mouezhioù disheñvel ouzh hini ar galloud. Kement-se a zispilj koulz da gouarnamant Madrid ha da hini Hernani. Pa vez skoazellet an holl gelaouennoù all dre yalc'hadoù ha bruderezh

lezennel e vez nac'het ar gwir-se da EGIN. Ha n'eus nemet da EGIN IRRATIA ez eo nac'het un aotre da vat da vezañ war ar gwagennoù. Ret eo mennegiñ e vez kemeret an divizoù-se war-eeun gant ar gouarnamant ha n'eo ket gant ur c'huzul dizalc'h eus ar galloud politikel.

War washaat ez a an traoù abaoe ur miz. E-kerz nozvezh ar 1añ a viz Kerzu ez eus bet kaset da benn ur furchadeg vras e burevioù EGIN, war urzh Madrid. O klask dielloù a-zivout ETA edo ar polis, un digarez a-feson evit klozañ he beg da vat d'ur gelaouenn nec'hus. Evel-se zo bet laeret er burevioù meur a urzhiaer hag a bladennig. An dra-se a 'z a a-enep d'ar sekret micherel met ne vern ! Degemeret he deus EGIN endeo skoazell un niver bras a Euskariz hag a Spagnoliz zoken.

Un touell e vefe krediñ ne sell an afer nemet ouzh an Euskariz. Gwirioù pep den da vezañ kelaouet, gwirioù pep den da gomz ha da vezañ klevet an hini a zo e kont. Dre skiant-prenet a bell 'zo e ouzhpenn pegen splotus eo evit ar stadoù, demokratel pe get, an taolioù fall arnodet en tu all d'eo harzoù. Ne vo ket ur gounid evit hor mouezh-ni mar bez graet he stal da EGIN. Gant pep kelaouenn minwasket ez a un tamm eus hor frankiz d'ar strad. ■ M. B.




### Afrika ar Su

## Liv an dud ha spered an amzer

**Etre ar 17 hag an 18 a viz Du, war-dro hanternoz, eo bet graet ar choaz gant pennoù ar braz eus strolladoù politikel Afrika ar Su, da ziskar ar geoded bet stummet gant ideologiezh gouennour an afrikanerien ha da fardañ ur bonreizh demokratel. A-benn taliñ ouzh red an istor, ez eus bet skoulmet un emglev-enebiñ etre bantoued hengounelour hag an tu broadelour pellañ afrikaner : Emglev ar frankiz.**



6 milion a Zouloued na fell ket dezho bezañ gouarnet gant bantoued all...



Frederik de Klerk, rener an nasional Party

Ur bonreizh da c'hortoz e vo ar mennad kinniget, disoc'h daou vloavezh ren dael etre Nasionale Party an afrikaner Frederik de Klerk hag African National Congress ar xhosa Nelson Mandela. Hiviziken e c'hello an holl geodedidi votiñ, en ur gompren re ar peder stad bantou lakaet da zizalc'h gant ar renad kozh. Hiviziken emañ an holl war ar memes pazenn dirak al lezenn, ha pa vefed gwenn pe zu, gwreg pe waz, eus ar genel mañ kenel. N'eo ket bet disoñjet ar gwir d'ober gant e yezh. Unneg yezh ofisiel a vo diwar-neuze, pa ne oa nemet ar saozneg hag an afrikaans gant un hevelep statut betek-hen. Goulenn a ra ar strollad broadelour bantou taer, Panafrican Congress, e vefe lakaet ivez da ofisiel, lod eus ar yezhoù aziat implijet er vro. Klask a ra gant ar c'hinnig-se kreñvaat e nerzh politikel dre zastum kensturmerien er boblañs a orin


aziat. Nav rannvro a vo krouet, rannvroioù galloudus o emrenezh. Mont a raio brezelourien Umkoto We Siz We, Goaf ar Vroad, skourr armet ANC, d'ober ul lodenn eus lu adframmet Afrika ar Su. Fardet e vo ar bonreizh da badout gant ar gannaded dilennet e ebrel 1994. Nac'het eo bet gant lod strolladoù kemerout perzh en dael, strollad ar zoulou Mangosuthu Buthelezi, Inkatha, ar strollad afrikaner mirour, Konserwative Party hag ar vroadelourien afrikaner daerañ bodet en Unvaniezh ar Bobl Afrikaner. Emaint o paouez stummañ un emglev enebiñ a-benn sevel efedus o zreiz da farderien ar renad nevez. Tuet o deus gant ar re-se pennoù div stad "Dizalc'h", re Bophuthatswana ha re Ciskei pa sav aon enno da goll o galloud. Klask a ra ar vroadelourien afrikaner sevel ur stad evito o unan, ar Volkstaat, ur stad-laager\* a vo kazi dibosupl da zresañ he harzoù war ar gartenn pa n'eus rannvro ebet lec'h ma vefe ar muiañ niver gant an afrikanerien, lavarout a ra tud ANC evit stourm a-enep un hevelep mennad e vefe ar volkstaat-se, ur seurt boerassic

park. (\*Laager : Moger dro difenn stummet gant kirri pa veze ar voerien o straññ dre ar Veld. Deut eo da vezañ arouez ar mod bevañ distok choazet gant an afrikanerien, o diskennidi, e-kreiz un endro enebour.) Tuet o deus zouloued Inkatha\* gant ar virourien wenn pa oa deut anat edo an tu kreñvañ gant ANC (\* Ur strollad broadelour zoulou a zo eus Inkatha, petra bennak e kaver estreget zouloued ennañ. Ur skos a zo, da skouer, ezel eus e guzul meur. Dont a ra d'an emvodoù gwisket gant dilhad hengounel e vro orin.) N'emañ ket ar vroadelourien zoulou daerañ evit gouzañv bezañ gouarnet gant bantoued all pa ne sellont ket outo evel tud. (Bremañ niv 121 miz Here 1991). Salv ma chomo berr seurt kilsturmerien da hadañ freuz ha reuz en Afrika ar Su. Salv ma tuo ar muiañ niver gant Nelson Mandela war-lerc'h klevout hemañ oc'h embann : "N'eus plas ebet en un demokratiezh evit ur gumuniezh pe ul lodenn gumuniezh o klask kemerout he c'hreñv war ar geodedidi all diwar goust o gwirioù-diazezh" ■

Paol ar Meur

## Raktres Elf e-tal ar Groazig

**Evit an embregerezh Elf n'eo ket don a-walc'h al Liger e Donvez evit degemer an eoullistri bras. Kaoz a zo gant Elf da sevel un terminal eoul-maen e-tal ar Groazig.**



### Ar raktres

Elf a fell dezhañ degemer muioc'h-muiañ a eoul-maen e Donvez, e lec'h ma n'hell ket mont an eoullistri modern. Dañjerus eo al Liger evit an embregerezh : re strizh eo ha n'eo ket don a-walc'h. An eoullistri a c'hellfe skeiñ ouzh ar gliannoù. Hervez ar raktres e vefe treuzfurmet an eoul-maen e Donvez atav met degemeret en ul lec'h all : e-kichen roc'h ar Forn, etre ar Groazig hag Enez-Edig. Don eo ar mor a 30 metrad eno, trawalc'h evit degemer an eoullistri a 250 000 tonenn pe muioc'h, un donder a 22 vetrad ganto. Ur boue a vefe (s. o. an dresadenn). Mont a rafe an eoul-maen da Zonvez gant un \*eoul-hent er mor gant un 11 kilometrad bennak, betek Penn Kiriag ha goude-se da Zonvez. Studioù ar raktres a bado betek 1995.

### An endro hag ar pesketaerezh

Da gentañ e oa kaoz gant Elf da sevel ur porzh "en dour don"

war roc'h ar Forn. Perak ne vo ket graet ? Distrujañ a rafe an endro ? Ya, marteze, met koustañ a rafe re ger da Elf, dreist-holl.

Riskloù zo gant seurt savadur. Dija e vez saotradurioù bihan er mor p'en em zilouz an eoullistri goulo goude o zro e Donvez (Marc'hadmatoc'h eo evit ar paramantour). Seurt saotradurioù a c'hoarvezo ivez war-zu ar Forn neuze.

Fellout a ra da Elf lakaat da grediñ e vo graet a-zevri war-dro ar surentez : ne vo ket diskarget un eoullestr pa vo re fall stad ar mor (adalek un avel a greñvder 6 hag un houl a 5 metrad). Bez' e vo atav bigi-vevzhiañ hag ur ramoker. Komz a ra Elf ivez eus e skiant-prenet e lec'hioù all eus ar bed.

Tout-se n'eo ket evit plijout d'ar re zo o vevañ war an aod. Aon zo gant ar re a vev diwar an douristelezh : peseurt "skeudenn" a vo gant an aod "gouez" ? (Sur eo n'eo ket ken gouez-se abaoe pell). Paluderien Bazh ha Gwenrann o deus aon

ivez. Ar paludoù-holen o deus ezhomm a zour naet. Ar baluderien a ziwall an endro gant o micher. Kement-mañ n'hell ket mont gant gwel un eoullestr o tiskargañ e-tal an aod.

Met d'ar besketaerien eo ne blij ket ar raktres dreist-holl. Ar riskl a saotradur a zo evel-just. Bez' ez eus ivez ar fed n'hellfent ket mui mont da besketa war-dro ar boue hag an eoul-hent. Pouezus eo ar pesketaerezh er Vro Wenn : 30% eus al labour a ya gantañ er Groazig hag en Turball.

A-bouez eo ar raktres evit Elf. A-bouez eo ivez evit ar pesketaerezh hag ar paluderiezh ! Gant ar gudenn-mañ e teu unan brasoc'h : peseurt diorren evit ar Vro Wenn ? Ur porzh brasoc'h evit Sant-Nazer ha Donvez, sevel tier e pep lec'h war an aod evel er Baol, pe un diorren all hag un douristelezh doujus ouzh an endro ■

Benead Lukian

\*eoul-hent = oléoduc

### Savadurioù Istorel

# Digredabl !

### BERR-HA-BERR

#### Abadenn-diviz (e galleg)

D'ar merc'her 12 a viz Genver 1994, da 8 eur 1/2 noz. Dont a raio Jean-Pierre Nicolas da gomz diwar-benn ur gevredigezh nevez " Arree-K'liche" (eus Brasparz), bet krouet warlene evit sikour an Indianed o vevañ war uhelgompennoù ar Guatemala. Ur film-video o tisplegañ penaos emañ ar skipailh o labourat a vo diskouezet e penn kentañ an abadenn. E kreizenn Sevenadurel Brezhon "Roparz Hemon", Plasenn Verdun, Gwengamp.

#### Dañs ha Sonerezh

Kendalc'h Il-ha-Gwilun a gemenn deoc'h e vo dal'het tri staj ganto d'an 22 ha 23 a viz Genver. Staj sonerien daou ha daou, staj Bombard hag ur staj-diazezh dañsoù Breizh. Evit lakaat e anv pellgomz da Yann-Baol Rapinel e Kastell-Bourc'h : 99-00-71-59

#### Fest-deiz

ar miz Kreizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" (Plasenn Verdun, Gwengamp) a vo aozet d'an 30 a viz Genver 1994 gant ar strollad "Retrait de permis" hag evel just Sonerien ha Kanerien ar vro !

#### Beilhadeg ar Vro

gant Yves Castel (e gallo hag e galleg) pred stripoù gant sistr d'ar 14 a viz Genver 94 adalek 8 e noz ti-krampouezh "Ar Duchenn Hud" e Begerel -kêriadenn al levrioù-Aozet eo an abadenn-noz-mañ gant kevredigezh Savenn Douar. Titour : 99.66.77.00

#### Fest-noz e Plouber

aozet gant ar gevredigezh Minran, d'ar Sadorn 22 a viz Genver, gant Ar Re Yaouank, Moal ha Chapalan, Nanda Troadeg ha Jaketa al Lae.



Ne chom eus Tour an Xlvet kantved nemet un nebeut mein e tal d'ar mengleuz.

D'ar Sul 12 a viz Kerzu, e Tremeven, e Bro-Oueloù, en deus rener ur vengleuz kemeret an intrudu da lakaat e implijidi da ziskar, gant o zourterien, un tour eus an Xlvet kantved !

Prenet e oa bet al lec'h-se gant embregerezh Rault gant ar soñj brasaat he mengleuz a zo tal-kichen. Met tour koad Men a oa renket e-touesk ar Savadurioù Istorel abaoe 1927. Neuze, a-drugarez da Gevredigezh ar Studioù Istorel ha Hendraouriezhel bro Oueloù (S.E.H.A.G.) a oa war evezh, e oa bet nac'het gant lez-varn velestradurel Roazhon an aotre da vrasaat diouzutu ar vengleuz war-zu an tour.

Ret eo kompren e oa savet tour koad Men war un dorgenn dedenus-tre e-keñver hendraouriezh. An tour, warnañ 14 talbenn, ar pezh a zo rouez, e oa ar savadur nemetañ a chome eus ur c'hastell bet savet war ur voundenn gladdalc'hel\* eus an Xvet kantved. E fin an Xlvet kantved e oa vet dismantret ar c'hastell dilezet-se, evit adimplij ar mein anezhañ. P'en doa perc'henn ar vengleuz ha tachenn ar c'hastell goulennet, ar bloaz-mañ, aotre da labourat donoc'h en dorgenn, e oa bet spontet bras an hendraourien o welet e oa unan eus dilerc'hioù dedenusañ e Breizh e-keñver an tisavouriezh brezel er Grenn-Amzer en arvar da vont da glet. Kroget e oa neuze ar S.E.H.A.G. da stourm evit mirout ouzh ar vengleuz da greskiñ war an tu-se, hag ivez evit kaout gwir da zifraostañ tachenn ar c'hastell evit gellout studiañ anezhi a-dost. (Ar perc'henn en doa enebet ouzh seurt studioù evit ar wech tout.)

Spi o doa an hendraourien e vefe tu d'en em glevet gant an aotrou Rault ha ne gomprenont ket perak en deus hemañ lakaet diskar a-greiz-tout tour koad Men. Anat eo n'eo ket an taol fall-se a zegaso an aotre da doullañ en dorgenn.

Ar pezh a zo sur eo en em glev ar prefed, ar c'hevredigezhioù difenn ar savadurioù hag an natur, koulz hag ar strolladoù breizhek evit ma vo kastizet garv an den kiriek d'an torfed-se.

\*ur voundenn gladdalc'hel = motte féodale

Silvi Donnart





## Koñchennoù al lezvamm

Unan hep he far a zo nevez-deuet ganti, degaset deomp gant Ouest-France, en he niverenn eus an 21 a viz Kerzu, evel ur prof Nedeleg. Ha, taolomp evezh, n'eo ket sinet ar pennad gant kazetenner ebet eus O-F : da lavarout eo he deus asantet O-F brudañ ur skrid savet gant servijoù abostolerezh ar galloud.

Ur vertuz nevez a zo bet kavet d'ar galleg, ur vertuz dioutañ e-unan, n'eus emic'hañs gant yezh all ebet : bez'ez eus gantañ ur galloud-euvriñ sebezus. "Le pouvoir d'absorption du français", emezo, a zo dreist da bep tra. Hag ur broenn a zo : ne bad ket pell da ober gant o yezh-orin ar paour kaezh tud o deus ranket dont da Vro-C'Hall evit o boued pe o buhez. N'eus nemet 2% eus ar familhoù en heksagon hag a ra gant an arabeg er gêr. Met 2% eus ar familhoù, pet den eo ? Tri milion ? pevar milion a dud ? 2% nemetken", eme dizoloerien ar "galloud-euvriñ-se" hag a zo bet roet d'ar galleg gant an Aotrou Doue emic'hañs.

Gwelomp. An embroidi o tont gant bugale, pe o c'heneil bugale en heksagon, a rank kas anezho d'ar skol. Pas da forzh peseurt skol : da skol-ar-stad pe d'ar skol gatolik ; anez-se ne vo ket a c'hopr-tiegezh evito. Hag-ñe e vo zoken gwarez-kevredigezhel evito, n'ouzon ket : n' am eus ket pellgomzet d'an Itr. Veil evit goullenn. Hevlene ez eus bet kaset kuit pevar imam - marteze muioc'h, diaes eo gouzout pep

tra -, n'eo ket dre an abeg ma vefent ket integrised, ha ne oant ket, met dre m'o doa savet skolioù arabek evit ar yaouank - pezh a zo ur pec'hed kalz brasoc'h. Ar vugale-se, skollataet e galleg, pa zeunt d'ar gêr, petra a gavont d'o dihueidiñ, ha da zerc'hel gant ar skollata : ar skinnwel e galleg. An dud vadelezhus a ra war o zro, o yec'hed, evit netra, a ya dezho e galleg : ne zeufe ket war o spered mont dezho en o yezh o-unan. N'eus nemet ar voskeenn, ma'z eont di, a zegaso un tammig skoazell d'o arabeg. Setu perak e klask an Ao. Pasqua, troet bremañ gant ar relijion, lakaat war-sav un Islam gallek. Gwir eo : ne zeu ket ar boliserien en tiez da ensellout peseurt yezh a gomzer eno. Heñvel e oa gant Franko pa zifenne komz katalaneg el lec'hioù foran. Heñvel gant Stalin pa lavare e oa ar relijion un afer brevez, hag e oa tu, d'an neb a gare, lavarout pedennou er gêr, met e oa arabat kaout katekiz pe gentelioù relijion er-maez. Ha c'hoazh e leze Stalin un nebeut kloerdiou da grakevañ -n'eus ket a skolioù-meur pe a gloerdiou arabek e Bro-C'Hall, zoken o kravevañ.

Da get e ya ar galloud-euvriñ souezhus-se pa n'emañ ket mui skourjez ar Stad holiveliel a-dreñv dezhañ. Da betra eo aet ar galleg e Jerzenez, e Gwernenez, e lodenn flandrezat Bro-Veljik, en New-Brunswick, er Maine, e Louisiana-daoust d'ar gouarnamant gall plantañ arc'hant eno sof-kont ? Peseurt pal d'ar studiadenh ha d'an embann war he zro e O-F ? Lakaat ar Vretoned - hag o breudeur er gwalleur - da soñjal n'eus kiriegezh ebet gant ar stad C'Hall e distruj o yezhoù : ar perzh-natur souezhus a zo gant ar galleg, e "c'halloud-euvriñ", an hini eo a zo kaoz. Bez e c'heller zoken skuilhañ un daeraouenn war ar "yezhoù-rannvro" lakaet en arvar gant ur vertuz ken dreist-ordinal. N'eus nemet un dra vat er pennad, ar pezh a zo displeget diwar ar prederour (gall) Michel Serres : ur Republik eo Bro-C'Hall, met n'eo ket un demokratelezh. Kement-se a ouiemp abaoe pell. Brav eo da O.F. hel lakaat da vezañ ofisiel.

P.D.

## Embannadurioù nevez

3 levrenn nevez (marvailhoù 10, 11-12)  
 Kontadennoù gant Mikael Madeg, embannet gant "Ar skol Vrezoneg".  
 Levrennoù 50 pajennad (30 lur an tamm), gant ur vinkasedig pep hini (40 lur an tamm)  
 - Kontadennoù eus Bro-Wened  
 - Kontadennoù eus Bro-Dreger ha Goelo  
 - Kontadennoù eus Traoñ-Kerne  
 Tro a zo evel-se da glevet un tañva ledanig eus Brezhoneg an tuioù-se eus Breizh-Izel  
 Kavet e vint en holl stalioù-levrioù, pe goullenn dre lizher e ti "Mesidour" 40, bis, stradaed ar Republik -29200 Brest- (Pellgomz 98-80-49-70)

## 3000 den e saloñs ar vugale

Berzh en deus graet ar Tañ Saloñs Liesyezhek al Levrioù evit ar Vugale e Breizh, ha berzh mat, petra bennak ma lided addigoradur iliz-veur Kemper war an hevelep tro, gant forzhik pompad...

Bet ez eus, war an daou zevezh, un tri mil bennak a dud o tont da welet an nevezioù embannet evit o c'hampinoded muioc'h-kare... Profuñ Nedelek a oa bet graet diouzh sour enta, mar ranker krediñ an embannerion deuet hag a oa ur pikol mousc'hoarzh war o dremm.

Laouen ivez ar skrivagnerion o devoa bet digarez da uzañ pluenn ha latenn o sinañ hag o komz gant o lennerien. Dezho bremañ da gendec'hel da lakaat ijin hag awen da c'hoari evit reiñ dimp levrioù nevez, a vezo saouret, hep ket a var, gant ar yaouankizoù a gar lenn (peogwir ez eus c'hoazh, re wir eo !)

Laouen c'hoazh ar broioù pedet, ha prest da zistreiñ. Tro o devo da ober - gant broioù all ouzhpenn - rak mennet mat eo tud ijin, ar c'hevredad aozer, da adkregiñ gant ar saloñs a-benn bloaz.

M.M.

## Levrioù nevez...

### Diyehz gant Jean-Yves Broudic

"Pa veze goullennet digantañ petra 'oa e yezh-vamm, e responte ne ouie ket, en ur gontañ e oa bet savet e galleg en un endro brezhonek. Ha bremañ e lavare n'en doa yezh-vamm ebet. -Diyehz.

**Skridvarnerezh**

Setu ul levr nevez e zoare, prederiadennoù war buhez mab-den, war an doare kavet, nac'het, difennet, addizoloet da zisplegañ e ene pe, kentoc'h, da lezel e ziemouez\* da gomz.

Ul levr stadañ eo. Ne glask ket reiñ kentelioù : arouezel e chom lavar Jean-Yves Broudic. Kaoz a vez eus hor yezh, ar brezhoneg, evel-just, eus an divrezonekadur met ivez eus pep diouer a yezh. Implijet e vez alies lavar an huñvre a zo ur yezh eus an diemouez, ma'z eus unan. Gwelet e vez ar gouzrech o tibab sevel pe chom hep ober hag o kregiñ e-barzh ur yezh denel.

Annaig Renault  
 diemouez : inconsist  
 gouzrech : sujet, er bredeifennerezh

131 bajenn. Ment 14,5x21. Golorin gant Marie-Laure Guégan. 60 lur an tamm.

### Moger an Noz

Ur romant gant Kristian Brisson  
 \*Savomp ur vogier ! Neuze ne

**OPER**

*skol dre lizher*

*deskiñ pe gwellaat ar yezh*

Cours de breton  
par correspondance  
— tous niveaux —

Skol Ober  
Gwaremm L eurven 22310 Plufur  
© 96.35.10.22

c'hello den hor gloazañ pa vimp en he goudor."

Ur mell skoilh a vo ar vogier-se avat, war hent ar garantez. Frouezhenn c'hwerv an dizunvaniezh eo a ranko an dud tañva a-raok da sklêrijenn ar goulou-deiz tarzhañ diwar ar menz santel. An amzerioù nevez a zo kreviñ enno ar spi a ziwano er c'halonou gloazet.

Gant ar pevare romant-mañ e tiskouez Kristian Brisson en deus gouezet kement e blas en hol lennegezh.

142 bajenn. Ment 14,5x21. Golorin gant Emil Granville. 70 lur an tamm.

### Ar Puñs gant Lu wenfu

troet diwar ar sinaeg gant Yann-Varc'h Thorel

Ar puñs ! Stern ha kalon eo ar puñs d'ar romantig-mañ a zanevell planedenn rust ha kalet ur gefredourez yaouank enket etre kevredigezh Sina he henvoazioù diouzh un tu, ha renad ar gomunourien diouzh un tu all. O lenn planedenn Xu Lisha e lenner istor kammigellek renad ar Strollad Komunour e Sina. Dezrevell a ra an aozer ivez ar pemdez en un doare spis ha pinvidik kement ha ma studi aske an dud.

Mousfent, flemm, teneridigezh, kement-se gant troiennoù barzhoniell, troioù-lavar pobl mesket gant luganoù politikel ha termenoù kefridiell a ya d'ober pluenn ar skrivagner-mañ. Dastumad "Skrid"

171 pajenn. Ment 14,5x21. Golorin gant He Yifu. 60 lur an tamm.  
 Kasit ho chekenn da Mouladurioù Hor Yezh, Tereza Desbordes, 1 plasenn Charles-Péguy 29260 Lesneven

### Albom Diwan

Albom kentañ skolioù Diwan zo nevez deuet er-maez ! Kinniget brav eo gant luc'hskuedennoù aleizh ! Pep skol, klas, servij melestradurel, stummañ hag all... a vez kinniget el levrenn-mañ (50 pajennad). Koust a raio deoc'h 50 lur an tamm, mui 8 lur frejoù kas.

Skrivañ da zDiwan - B.P. 156 - 29411 Landerne Cedex gant un chekenn 58 lur.

## Geriadur Brezhoneg-Alamaneg

gant Gerard Cornillet (skoazellet gant Jakez Konan).  
 Setu evit ar wech kentañ ur geriadur brezhoneg-alamaneg ha na vo ket nemet ur roll-gerioù hep muioc'h a spisadurioù eget un droididigezh sec'h ha treutik eus gerioù zo. Tremen poent e oa d'hor soñj ober seurt labour er mare ma vo klasket sevel pe kentoc'h adsevel - Europa war diazezoù nevez : re an doujañs evit dibarderioù sevenadurioù disheñvel ha kenglotaus war un dro. Tremen poent e oa e gwirionezh heuliañ roudoù ar marc'hger alaman eus dibenn ar 15<sup>vet</sup> kantved, an aotrou Arnold von Harff, ha kinnig d'ar c'hermanegerien da gentañ un alc'houez da zigeriñ kev burzhudus ur sevenadur kuzhet ha na vez anavezet gant an darn vuiañ anezho nemet dre ar gwiskamantoù pe dre ar sonerezh da geñver ur "festival" bennak dizoloet e-kerz un hañvezh tremenet e Breizh-Izel. Mes na zisfijomp ket evelket ez eus pell zo dija gouzeien ha studieren er broioù almanek hag a bleustr war studioù ar yezh, al lennegezh hag ar sevenadur brezhonek. Spi hon eus e kavint gant ar geriadur-mañ ur benveg dereat da vont larkoc'h gant o studioù ; salv ma vezint awenet gant al labour-mañ da sevel d'o zro unan all a vefe ledanoc'h, klokooc'h... (..)

Salv ma vo ar geriadur-mañ ur skoazell a dalvoudegezh evit kement brezhoneger a fell dezho donaat o anaoudegezh eus an alamaneg hep bezañ rediet da dremen dre ar galleg !

Mouladurioù Hor Yezh -1, plasenn Charles Peguy -29260 Lesneven-450 pajenn-

Lennit

**al liamm**

Skrivañ da AL LIAMM  
16 stradaed des Fours à Chaux  
35400 - SANTI MALO -

Koumanant bioaz 150 lur  
(studieren, tud dilabour  
100 lur)



# TROIAD E BREIZH GANT ALAN STIVELL



Alan Stivell, Breizhad ar bloavezh 93, e Breizh e miz Genver

## EN ORIENT EVIT UR GANOL SKINWEL E BREZHONEG SADORN 29 DA 3EUR



Gervel a ra da vanifestiñ evit ur servij skinwel e brezhoneg SAB - Stourm ar Brezhoneg. Emgav a vez roet deoc'h en Orient e dibenn miz Genver.

Gant Kate Bush, Shane McGowan, Laurent Voulzy, Doudou N'Diaye Rose ha Yann Fanch Kemener eo deuet a-benn Alan Stivell da sevel ur bladenn-arc'hant a-zoare gant 17 ton anavezet hag adkem-pennet evit an degouezh. Tonioù a oa bet er bloavezhioù 70/75, eus ar re anavezetañ e Breizh hag en Europa. Kaset o doa kantadoù ha kantadoù a dud yaouank war du ar Brezhoneg ha sevenadur Breizh.

Pinvidik ha glan eo chomet sonerezh Alan Stivell. Bet eo bet hemañ unan eus ar re gentañ oc'h ijinañ ar "World Music". Derc'hel d'an hengoun hag ijinañ an dazont. Setu pal e sonerezh.

Evit 1994 e fell da Alan Stivell adskoulmañ darempredoù start gant ar Vretoned ha digeriñ dorioù ar sonerezh Keltiek d'ar rummadoù nevez. E dibenn miz Genver e Kinnigo abadennoù e pep korn ar Vro. Setu amañ da heul deiziadoù ar sonadegoù.

## MIZ GENVER 1994

**Sant-Brieg - Meurzh 25**  
Sal Robien

**Naoned - Merc'her 26**  
L'Escale

**Roazhon - Yaou 27 -**  
- Sal ar Site

**An Oriant - Gwener 28-**  
Les Arcs Kewenn

**Brest - Sadorn 29 -**  
Sal Penfeld

## OBER

kontrollad dre ligher  
Gwaremm Leurven  
22310 Plufur

